

---

## RECIT

*Eus ar maleur horrubl digüezet gant an drivet  
bataillon eus an unnevet regimant leger o tre-  
men pont orjal Anger, vqdro unnech eur anter  
eus ar mintin, ar meurs 16eus a visebrel 1850.*

(Calz a Vretonel a voa en o zoues.)

---

Var ton Cantic Christ bras ar Vur,

---

O Doue ! Mestr souveren, Doue trugarezus,  
Deut d'am c'helen, me ho ped, var eun darvoud  
eüzus...

Eul lincel a gaòn, allas ! zo stignet var ar Franç !  
Eanoc'h hepqen, va Doue, e mâ hon esperanç.

Abaoue darvoud eüzus eus ar Berezina,  
Ne glêv jot, dre c'hraç Doue, comz demeus eur  
seurt tra;

Mes ar maleur diyeza a zigas sónj ouz se,  
*Hoc a ra straci' pep calon ha fraîta pep ene.*

Va breudeur qer Bretonet, demeus a hep  
 contre,  
 Deut da guemesq ho taeiou hirio gant y'a re-me;  
 Deut da zelaou eur recit gant calz antantion,  
 Zo eur sujet a c'hlac'h ardabep christen güirion.

D'ar meurs, c'hoezec a ebrel, en an heut qent  
 creiz+de,  
 Er guær demeus a Anger ealz a dud a rede  
 Da velet oc'h éruout an drivet bataillon  
 Eus an unnevet leger, ar josses o c'halon.

Eur pont hir bras neud orjat a voa da basseal.  
 Ha qerqent ar vataillon zo êt varnâr ractal.  
 An avel a vox spontus, obier a nê glao bras,  
 Ar rivier voa furorus ha terrubl he fourgas.

Er penn eus ar vataillon voa'n tabourinerien,  
 Ar saperien, ar music, haq ar volijeriei;  
 A boan o d'oe ar re-mâ quïstet diwar ar pont,  
 Ma clêvjet criadennou a gargue oll a spont.

Eur straci' ar spouronnussa a voe ractal clôvet;  
 Penn ar pont zo difframmet gant stroc' ar zoudardet,  
 Ha prim rel eul luc'heden eo coeet gant furor...  
 O va Doue beniguet ! ô ua goassa horrer !



Dre wa coee ar re aroc en dour a rencaðou,  
 Rencou all a ziruille var ar vayonetezou,  
 Hac ar c'hoatach eus ar pont a goee varneze,  
 A rë dë en fong an dour caout ar maro neuze.

Rac ar pont voa aur pez, eve! eursqeul harpet :  
 Ar penn d'an neç'h naelle dele'bel muiden ahet.  
 Ar penn d'an traõn, dizac'het, voa en fong ar  
 rivier.

O Doue, pebes arvest ha pebes dizesper !

Ne allent qet, an dud paour, miret dont da  
 vervel.  
 Pe var bayonetezou p'en dour : ô stat cruel !.  
 Ar c'hri hac an dizesper a voa eno dre oll,  
 O velet qément a dud eno ouz en em goll.

Ar renç dire a voa tost da benn ar pont chomer,  
 O vont adre prontamant int en em sovetel :  
 Ur pas hepken, hac e voant diruillet er rivier,  
 Evel, maleürusamant, o c'hamaradet qer.

Oll habitantet Anger zo diredet eno  
 Evit sicour an dud paour d'achap ouz ar maro.  
 Courach, Angevianis ! courach, tud jenerus !  
 Doue a recompanço hec'h astou vertuzus.

En em gavet zo ive calz'a seurezet gris.  
 Goaset, graguez, bugale, ha nombr tud a ilis :

**Arre-mâ' n'em zivouisq' eus o zoutanennou:**  
**Da c'holo an dud blesset gant ar brassa soignou.**

Côlhejou , orillerou , tapissoù ha dillat  
 A zigasset d'an dud paour a ellet sovetat:  
 An oll en em ampresso gant ar brassa sourci .  
 Da gass gante an dud qèz da soigni en o zi..

Ar vagueyer gant courach a yê a bep coste  
 Gant bagou da zovetat an dud qèz a veuze;  
 Eürus voent , dre c'hraç Doue , mes gant calz  
 poan eno,  
 Evit dont da breservi nombr tud eus ar maro.

A vernou' ruill an dud paour , treiniet dre nerz  
 an dour ,  
 Crappet an eil d'eguile , o crial d'o zicour ;  
 Mes fourgas ar goaguenou a zepar anez,  
 Hac e zint a nebeudou , allas ! beuzet neuze.

Sönjit er maleur horribl , va breudeur chris-  
 tenien :  
 An nombr eus ar re veuzet zo-tost da dri o'haont  
 den!!!!...

Sönjit iyez er glac'har zo en o famillou :  
 Ar Franç oll a dle qemer calz pers et o c'hanoù,

Impossubl eo niveri-an aetou jenerus.  
 O deus bet lec'h en andret an dud qermaleürus:  
 An oll voa leun a galon evit douguen sicour  
 D'an dud voa a vandenou treiniet gant nerz an-  
 doug.

Gouscoude na ellomp qet doni da dével amâ  
 Actionou a gourach zo deus ar re gaera ; ..  
 Mont a reompa bremâ da rîl d'anaveout,  
 Ar re ar principala hon eus ellet gouzout.

Eur zoudard courajus bras eus ar re sovetet ,  
 Qerqent var bord ar rivier zo en em divouisqet ,  
 Hac en deus saillet buan ebars en dour neuze ,  
 Ha da galz e vignonet e rentas ar vue .

Eun loqer eus a Anger, Turgis en e hanver ,  
 En em stlapas er rivier, hep aoun rac an danjer ,  
 Hac en deus sovetaet , dre ar boneur brassâ ,  
 Calz a dud voa var ar poent eno da berissa .

An autre Loup, letanant, en déveus sovetet  
 Deg den demeus ar maro, a voa cazi beuzet ;  
 Ar jandarm hanvet ar Reinch, pemzecazovetas ,  
 Hac eun tabouriner-mestr, pemp, dre eur boneur bras .

An autre Rousseau, calve, en deus sez so-  
 velet ,  
 Hac ar baguer Pérutier en e vag tri tennet ;  
 Eur martoled a bos daouzeo prest var ribl ar  
 rivier ,  
 Hac eur plac yaouanc a drap en dour un officer .

Ar jandarm hanvet Briquet, en eur vag antreet ,  
 Ha crog stard endro dezi calz tud disesperet ,

A ra e oll effortchou vit er vag o zenna,  
Mes an dour voa furoret : tel eo dê perissa!...

Eur gantinierez iye deus an dour zo tennet,  
Mes e daou buguelic paour, si vos, a zo beuzet!  
Ansin, oll, bras ha bian voat eno courajus  
Dateli ar brassa siceur d'an oll dud maleürus.

An officerien Dore (1), Collez ha Carrette,  
Forguez, ar Bries iye zo privet a vue;  
Ar porte-drapo, allas! a zo iye beuzet  
En eur derc'hel e zrapo en e zaouarn serret.

An drivac'h à vis ebrel peguement e voa crif  
Güelet cant pêvar-uguent soudard da entéri!...  
Seiz chariot varnuguent carguet a dud beuzet:  
Ar spouron en peb calon voa eno antreet.

Oll bêleyen eus ar vro voa en antêraement;  
An oll autoriteou a voa iye presant,  
Président ar Republic ha ministre ar brezel,  
Hac eun niver bras a dud bac a dost bac a bell.

An oll staliou en Anger en deiz-se' voa sertet;  
Ne velet a bep coste nemet tud glac'haret.  
Calz a o'hraguez a seljot o vouet a stanc ha droz;  
O sonjal en famillou an dud qèz maleürus.

Er plac m'eo bet ar maleure devoa ar rivier  
Peur-gomunamant atao trègont troatad doun-  
der,

(1) Dore, Breizh, gwinidic eus Géengamp.

Hac ar pont tri-c'chant troatad hirdet a uz d'an  
doar:

**Penos-eta achappi? penos caout nep sicour?**

Cant-tri-uguent den a zo en hospital, sivoas,  
Mes cavet vo a greder corsou tud benzet c'hoas:  
An doux, hep par, a dolo soudes varaxriblou  
Demeus an dud maleürus calz demeus a garfou.

President ar Republic en hospital zo bet  
O visita'r zoudardet a voa bet sovetet,  
Hac e zeo bet generus ebars en o andret;  
**Ar pez a zouças o foan d'ar paour qèz tud blesset.**

Daou devez goude'r maleur voa en em ras-  
samblet  
En eur c'hourt bras a Anger ar re yac'b sovetet:  
Neuze voe grêt an appel; mes allas! va Doue,  
Arrencou avoa ggal sclêr: an darn vrás a vanqe.

Gant pebes carante vrás eno ar zoudardet  
A boc an eil d'eguile, carguet a dénerdet!  
O daoulagad leun daelou, e lavarent neuze:  
Camaradet! mignonet! rentomp graç da Zoue.

En oll guæriou hac'ive en oll rejimantchou  
E vo, hep dale nemeur, grêt souscriptionou  
Evit soulien famillou an dud qèz maleürus:  
Ni iye ta, Bretonet, bezomp oll jengrous.

Entrezomp-ni, Bretonet, afao güir gristen-nien,  
 Adressomp oll da Zoue hirio peb a beden  
 Evit an dud maleürus zo preiz d'eur maro cris,  
 Ha lavaromp evité pep a *Dé profundis*.

O va Zalver adorabl! recevit da repos  
 Ar victimoù maleürus en gloaf ho Parados;  
 Grit rën en o famillou ar gonsolation,  
 Hac en horbrô guera François peoc'h, an union.

### F I N.




---

É Montreulez, e ty LÉDAN, Impr.-Librter.